

# POBL VREIZH

4<sup>L</sup>

HERE 1979  
NIV. 116



*Pessort amzer da-zont ewid Breizh ?*

# JAHINEREZH

Digoret eo ar prozess bras. Heni an FLB. Unan ouzhpenn. War an ton bras e vez gwraet an traoù : dirag Les-Varn Surentez ar Stad emañ an damallidi. Testoù e-leizh, alvokaded e-leizh, barnerien e-leizh...

Meur a wech, hag heb dihan, hon eus bet-ni lavaret, ni re an UDB, ez omp a-eneb krenn d'an doareoù-ober ha d'an distrujoù gwraet gant re an FLB. Travalc'h, h.a. Ne fell ket da bobl Vreizh, 'mod ebed, e vefe drañhet traoù ; en he hanv, sañset. En he hanv ne vez ket gwraet, peogwir n'emañ ket a-du. Gwir eo e c'hell pobloù zo klask tizhoad frankis dre ar gwall-nerzh. Dre amañ, n'emañ ket kont e-mod-se : n'eo ket deuet ar mare - mard emañ da vont d'ar stourm gant armoù hag en ur ziskar savadurioù ar Stad C'hall kolonizator. Se ne vir ket ez omp a-du evid huchal a-boues penn ez eo kolonizator ar Stad C'hall amañ e Breizh ; se ne vir ket douzhipp a embann he deus pobl Vreizh ar gwir da c'houlenn an emnerezh demokratel ; se ne vir ket douzhipp a stourm e-diabarzh stern al lezennoù, forzh pegen fallag e c'hellont bezañ ahenall, evid kass war-raog an digolonisañ. Mes an armoù hag ar plastik, nann. Pas amañ. Pas breman.

Votet eo bet gant Burew Politikel an UDB e chomje heb piw bennag a zo esel anezhi heb mont da dest da Baris ma vefe goulnennet digantañ mont. Perag ur sort mennad ?

1. En aner e vez gwraet an abadenñ harwet « prozess » ; araog ma krog an traoù, e vez bet diviset gant Kusul ar Vinistred bloavezh kastiz a bako an damallidi. Ar c'hoari n'emañ ket war al leurenn ; er c'hamprou-adreñv ne laran ket.

2. Mont da dest a vefe, evid un UDBour, bezañ kemeret evid unan o roññ kred ha gwarant politikel d'an damallidi ha d'ar skipailhoù, FLB, Travalc'h, m'int, pe m'int bet, sili anezho.

3. UJ leurenn-brezeg al Les-Varn ? N'eo ket. Ne c'heller ket komz en un doare fraezh, ressis hag arlivet war-un-dro. Bras eo ar risk da vezañ kemmesket gant ar bannadegoù drañhet. Kement tra oc'h achuiñ hant -B zo laketaet da FLB gant ul lodenn vras eus pobl Vreizh. Hag eus tud, war ewezh dalc'hmad, prest d'ober ar meskaj a-ratozh kaer.

4. Ken pell emañ dielfennadenn bolitikel : an UDB diouzh heni al lodenn vrasañ eus an damallidi, ma yaje testeni an UDB-ourion a-eneb fa interest an damallidi, ha ma ra rajemp nemed ponnerraad ar bec'h a zo warne.

Se ne vir ket n'eo an UDB, e mod ebed, kengred gant ar Stad C'hall. Ar c'hontrol zo gwir. Gouzomp a raomp e vez harzet ha kraouet tud e Breizh en un doare tided. Gwashoc'h zo : spontet e vez an damallidi... Skoet e vez gante, jahinet e vezont. Ya, bez eus bet jahinerezh e Roazon e-diabarzh savadur ar SRPJ. Setu amañ neuse un diverrañ eus al lizher-klemm bet kaset da Brokular ar Republik gant Kristian Merer, toull-bac'het e Fleury-Merogis, ha bet jahinet e Roazon.

« War an enor e roon da wir ar fedoù amañ da heul  
« Aet kuit diouzh Kemperel warde 5° eus abardaez ar yaou 14 a Vezheven ez on en em gavet e-diabarzh siliou SRPJ  
Roazon warde 9° nos, bet podet ar veaj 4 eurvezh, ha me bet chomet o-hed an dewezh heb tamn da zebriñ.

« Gouleno a ran ur pennoù-amzer evid diskiñhañ ha dastum ma pennoù ; refuset eo din... Lavaret a raer dig' me eus kemeret perzh en eil gwailh-dal Ti-Voujret... Refus a ran lared an distraññ gant re ken na m'eo amzer d'en em soñjal hag e roon da c'houd ne'm eus netra da ziskleriañ.

« Wardo 11° ez eus deuet daou zen e-barzh ar sal ma oan enni, hag o deus kroget da roññ flac'hadoù din, o klask ma lakoad an anvso e oan eus paotred ar gwailh-dal.

« Neuse taolioù-treid, kildornadoù ; gweet ma blew ha ma barw din, gwraet

kemendall da'm diwvrec'h, kilpennoù, klabanoù douz ma bruched, flac'hadoù din war ma c'hein ha war ma stomok (epad 10 munut ez on chomet dirfiv ; gant ur spoueñn c'h'web eo bet torchet ma bisaj ha ma c'hilpenn din). Dalc'hmad e chome e-barzh ar sal an doou zen a skoe ganin, hag iwe, a vare da vare, e vese 3 pe 4 all o dud oc'h ober goulennoù ouzhin heb dihan diwarbenn ar gwailh-dal ha ma drempe-dou gant ar FLB.

« Wardo hanternoz hanter pe un eur, ez on bet diwisket, laketaet da astenn, hag e teus unan eus an doou zen da lakoad ur reolenn din e-barzh ma fraes.

« Un hanter-er warlerc'h ez eus en em gavet un enseller en deus roet urzh da wiskañ ma dilhad din, ha goude-se ez eo en em dennet.

Ti-Moultrezher « Iroise »  
29200 Brest  
Rener ar gelaouenn  
Falc'h Merzhanou C.P.P.A. 50 091  
1700 skwerenn

# E ROAZON

« 5 pe 6 a dud zo deuet d'ober war ma zro, da'm goulnnata, da'm c'hunujenniñ, hag ez int oet e-moas.

« Taolioù en-dro, ur wech dre vare, beteg 3° beure. D'an eur-se, beteg 4° e klasker ma lakoad an anvso dre skrid : ne anevan sort (N'eo ket bet a gwraet implij eo ar gwailh-nerzh e-kehid-se).

« Da 4° he ochu an abadenñ.

« Da'm soñj, o deus ar re harzet ha bet laketaet er siliou tostañ, kletwet ar pezh a zo c'hoarvezet etre 11° nos ha 3° beure, en nosvezh kentañ-se... Nagenniñ krenn droag-nervennoù, en defe rediet ar bolissed da waskañ warnon dre an nerzh. An deiz warlerc'h ez eus bet roet da c'houd din, gant ur c'hargiad, penoas, ma trofe ennon dougen klemm hag d'ober hanv eus paper-testeni ar medissin, e vefe degasset a-eneb din ur skrid-tomall o roññ da c'houd e oan en em savet.

« Setu amañ paper-testeni an D' Leleu, eus Roazon :

« Bisitet 'm eus an Ao. Merer Kr. : kavout a roer warnañ bronduadiou o 2 sm a dreusvet, o-res gant diw gignen ar vrec'h, hag iwe ur gignadenn war-hed 5 sm a-res gant penn-araog ar bruched, hag e-leizh a vronduadiou bihan un nebeud mm, tost d'an daouglad hag o-res gant ar sikouarn zehou ; donf a ra ar gloasadiou-se, diouzh ma lavar an heni o-us hanwet, diwar ar c'hreizderioù gousañvet gantañ e-diabarzh siliou an SRPJ e Roazon, m'en em gav enne er mareoù-mañ dindan ward strizh ».

« Bez eo ar fedoù-se un dorridigezh c'hreus eus Diskleriadur Gwirioù Mab-Den 1789, eus Diskleriadur Olivred Gwirioù Mab-Den 1948, eus Fouranglow Europead Gwirioù Mab-Den, bet kadornet gant ar Frañs d'an 3 a vis Moe 1974 (hag ispisial e rennabenn 3)... ».

Jahinerezh e Roazon... Evel ugent vloaz so en Algeri... Setu ase Frañs Jiskar. Jiskar n'eo ket Amin Dado, n'eo ket Bokassa ken-nebeud. Mes en e hanv ha dindan e aotrouniezh, (ha martese gant e absoivenn, piw 'oar) emañ ar Stad, (ur Stad hag a les embann diwar he fenn ez eo bro ar Fran-ki), ar Stad ma leser ober enni gant doareoù-ober diwanet diwar an dispri e-keñver mab-den. Doareoù-ober diwanet iwe diwar lajñ diabarzh an « efedusted » iwe ma klask dilisad ar bed all heun tizhoad, ha kement-mañ abaoe. Hitler, Stalin, beteg Amin Dado, Bokassa, Videla, Pinochet ha meur a-pligant all a zo oc'h ober e sod hag e vuntre war o bladenñ hanwet douar.

D'ar sadorn 13 a vis Here, e Bod-mear, fest-nos savet evid harpañ skol DIWAN Ar Releg, gant sonerien ha kanerien ar menec'h.



Wardo ar 15 a vis Gwengola, ez eus bet gwraet, e Pazenas (34), e Bro-Okitania, un nebeud dewezhoù-stud, kaset en-dro gant kostezenn CERES ar PS Yezh-OK. An danvez a oa : « Laret pa heus : emnerezh ? » (« Vous avez dit : autonomie ? »). Pedet e oa bet an UDB da vont di, hag ez eo bet karget J. Guégüniat, esel eus Burew Politikel ar strollad, da gass da CERESed ar C'hrevezet kelou mad an UDB... E karg emañ J. Guégüniat eus kelouennou politikel an UDB : Le Peuple Breton ha Pobl Vreizh.

# HARPIT POBL VREIZH

KRP 2746-79 ROAZON  
CCP RENNES

# PLOVAN : ATAW DA WERZHAÑ

Goude ali a-eneb kommission an tier departamant Penn-Ar-Bed, e soñje d'an dud e oa interet afer an 20 ti-vakañsoù « Invest-Plan », ur gompagnonezh vras deus Brussel. Ar c'hontrol eo : gant sikour maer Plovan, ul lodenn deus e goksailh, an depute Guerneur hag e g' Contrat d'Armor », ez eus bet ijinet ur studiaden « étude d'impact » e gallec, ur mod nevez da droñ kramponez deus yod, pa n'eo ket siriuz tamm ebet ar studiaden-se. Da c'hoarzhin zo memes alies awal'h e-barzh. Siriuz awal'h eo bet memestra evid an Ao. Prefed, rener meur an oll draoù hag an oll dindan e departamant, rag

diwar ar studiaden e ray hemañ e soñj hag an droed da sevel ur greisen vakañ-so, ma n'eo ket ur vech !

Penaos e yelo an traoù ? Memes gant ali a-du ar Prefed, ne vo ket possibl da « Invest-Plan » sevel an tier : un nebeud peñanted yaouank ne fell ket dezo gwerzhñ o douar. Ar C'homie-Difenn, skoazellet gant sindikadoù ha strolladoù politikel — en o zoues an UDB eveljust — a zikouez d'an dud pegen daljers eo gwerzhñ an douaroù, kass d'an traoù al labour-douar ha drailhañ muioc'h c'hoazh an implij er vro.

Loeis Kleac'h

## KOMANANTOÙ

P	boutin	40 L	V
O	skoaz	60 L	R
B	pe ouzhpenn		E
L	KRP ROAZON		I
		2746-79	Z
		C.C.P. RENNES	H

## CAPÉ DES MOUETTES TAVARN AR SKREWED

Guiness diwar ar waskeres  
—  
Porzh a goñvers  
**BREST**  
Tél. 44.33.21

# HARPIT POBL VREIZH

KRP 2746-79 ROAZON  
CCP RENNES

## 5\* listennad

P. Ar Gall, Plogernew	40.00
J. Y. Brien, Brest	60.00
G. Merel, Naoned	40.00
Y.-V. Montreer, Logiv-Lannuon	60.00
Eric P., L'Étang-la-Ville (78)	20.00
Jakes G., Lannuon	20.00
P. An Digercher, Plovec'h	10.00
Herve G., Evreux (27)	30.00
D. Nicot, Angers (49)	20.00
Y. Le Grand, La Ferté Allais (91)	60.00
Yann-Ber D., Nanterre (92)	20.00
Yvon P., Remungol-Laguenec'h	20.00
M. Le Roy, Leclagnac	20.00
	430.00
Diwar al listennadoù all	1720.00
War-un-dro	2140.00

Trugarez vras da brofouren ar mis-mañ. N'int ket gwailh stank, gwir eo. Lod zo kousket martese. N'int ket koulskoude. Ar pezh zo, eo emañ digor ar bloaz ; ar skol, na boud e vez embannet emañ evid netra, e oar peb heni ar pezh a goust dehañ : ker l'ouzhpenn kement-se, gant ar c'hresk spontus war an traoù, ne c'heller ket dont a-benn da beañ e trab lech, nemed en ur zioverñ traoù. N'emaomp ket kin diwar re, mard omp bet, lod shanomp d'an nebeutañ (hag al lodenn vrasañ eus ar Vretoned zo diwar re nebeud, pell zo, gwailh bell zo !).

Kompen e raomp, ni amañ paotred skipailh Pobl Vreizh, n'eo ket aes d'hor oll lennion kavoude, e foris a godell, 20, 50 pe 60 lur da gass da bobl Vreizh. Bras eo hon ezommoù koulskoude, hag e vezomp dalc'hmad oc'h ober burzhadoù (ya, burzhadoù !) evid peurbesañ hon dieou. Gant 1000.00 lur heb mis eus ho perzh e vefemp rekouret kaer, lennion ha komananterion ger. Diwar vremañ, trugarez vras da re ahanoc'h a c'hello ober un dra bennag, un dra bennag ouzhpenn.

Goud a rit ervad ez eo Pobl Vreizh ur gelaouenn savet gant an UDB ha perc'hennet ganti. Ur gelaouenn e brezhoneg o komz eus politik. Eus traoù all iwe, mes eus politik memestra. N'int ket stank ar c'helaouennou brezhoneg ma bez hanv warne eus politik. Ahanta ! Eno emañ an dalc'h. Petra hon eus ar c'hant a-berzh Stad d'ar strolladoù politikel. Mad ar ieu, eme Yann Saletag, Gortos, Yannig. Roññ ar c'hant d'ar strolladoù politikel o deus heb a 30 dileunad pe er Gamp pe er Senat. TREGONT N'eo ket daes gweled emañ o klask diskar, nisañ ar strolladoù bihan pe nevez savet. Evel epad kroget botadegoù an Europ, emañ o klask roññ muioc'h a laris, a lusk, a nerzh, a boues da c'hoarzhin d'ar vrasañ gant ar GMP, PS, RPR, UDF. N'eo ket daes gweled peñsed den pilpous hag erfonter eo ar Jiskar. Ar vech ur warnañ hag ar foerell gantañ, ya !

C'hwil eo neuse — ma vez laketaet al lezenn da basseal, hag e vo klasket ober —, c'hwil eo neuse, lennion ha mignoned Pobl Vreizh, ar re a ranko sikour shanomp, rag gweled a raomp petra 'd'ar ger « demokratiezh » e-barzh gennou ar Gall Meur a zo e penn an traoù — talvoud a ra kement ha p'pousserezh, brasoni, rogoni. Ar bourc'his bras m'eo Jiskar n'eo ket nec'het gant ar Vretoned, ha nebeutoc'h c'hoazh gant an UDB hag he c'helaouenn bolitikel vrezhoneg. Ar gennou flour a vez o tont eus e c'hennoù gantañ, e gallec bras, n'int nemed awel ha moged.

Ur wech ouzhpenn : Ni hon hunan. Dorn-ha-dorn neuse Bretoned kar-o-bro ! Pobl Vreizh



Amañ n'emaomp ket e-barzh ur gouel retro...

## AR GOUELIOÙ RETRO

Beteghenn e vese asoet, epad an hañv, gouelioù folklorel. Asoet e vesent ewid an douristed, ewito, sañset, da zisoleñ pinwidigezhioù hor bro Vreizh, a zo, evel ma ouzoc'h, kêverioù hañv 'zo er bed. Paotred ha merc'hed ar C'helc'hioù Keltieg a vese lerc'h enno a tispekañ, dirag an oll, brode-rezhioù ha dantelezhioù o gwiskamantoù breton. Anavezoud a raomp mad an traoù-se ha ne vezomp ket gwall blijet peurliesañ gant sort abadennoù, a denn kentoc'h d'ar gastaouerezh (1) eged d'an arz. Med kustum o oamp. An dra-se a rae lod eus hor gwelva (2), un tamm evel al Lavar Du ha kreizenn nukleel Brennilis. Hogen, abaoe ur pennad zo, ez eus bet gwraet arskaouedennoù : ur c'his newez o a tiwan, heni ar gouelioù retro, ma vez diskouezet ar micherioù a-wechall : 'an dornañ, ar gwiderrez, an nezerezh, ha me 'oar. Kement parrez e-kichen an ood, ha zoken an douaroù, evel e Boulvriag an deiz all, a fact adkavoud ar gwizioù, evel ma skrivie an Ouest-France ur c'helouenner eus ar finañ.

Hag eveljust, newez so, 'm eus lennet, dindan bluenñ ar c'helouenner brudet, e oa arabad ober e veg figus, tech an intelektuael « skizo », ma gomprennet netra e ezommou don ar yoc'h (4). Ar si nemetañ a gave enno, hag enñ gwall zister, so e vefent asoet ewid abegoù kenervezhel (5), da lâred eo ewid an abegoù nemeto a gowjen reit.

Me, marteze, zo kaner fall. Med lâred a ran va soñj krenn ha krak : n'on ket ewid en ober gant sort gouelioù. N'eo ket koulskoude e tisprisen an amzer drement. Meizañ a ran (6), kement ha n'eus

forzh piw, talvoudegezh an hengoun (7), ha penaos n'eo ket possibl krouñ un da-zont (8) heb en em harpañ war an tremened. Med ar bobl, pe 'z a d'ar gouelioù retro, n'eo ket ewid klask harp war an amzer drement, mont a ra kentoc'h da glask repu. Ober a ra un DISTRO da wechall, EN EM STAGAN a ra douch an tremened (evel ma lavarte Freud eus an henienn) (9) ; ha kement-se zo fall, klavidi, neoussag. Pa n'heller ket kân dalc'her penn d'ar gwirvoud (10) (penaosenn a Wirvoud), assantiñ da ziaesterioù ar vuhez, a tec'her kuit. Ha meur a zoare zo ewid tec'houd kuit : an emlazh (11) zo unan anez. Mes bez'ema iwe an dram (12), an alkoal pe — ken

divent (13) ma 'z eo faltuz (14) an den — ar splaj (15) en amter a wechall.

Poan 'm eus o kredin e vefe ar memes tud a gement a vefe dodennet gant sort abadennoù, hag a vefe mennet war an dro da stourm ouz distroñ al linennou-hent-houarn, pe ewid miroud ar vro an usinnoù an arvar (16). Prest kentoc'h da ressew gant anaoudegezh vad profoù (17) madelezhus hor President awenet (18) : an douristelezh, an arme, ar c'hreizennoù nukleel.

Gwir eo, ne vez ket ken sklaer-se ar gudenn (19) dalc'hmad. A-wechoù, epad ar gouelioù-se, e vez savet c'hoarioù breizhad : ar sevel ar berchenn, ar vach-yod, hag all. Ar pezh a zegas ur wir levezad d'an dud. Hogen, arabad kemmañ ar metadoù (20). An emwiziennañ (21) hag an emstagan (22) n'o deus ket an hevelezh ster (23) nag an hevelezh talvoudegezh. Ha ma kreñve an emwiziennañ ar galloud-ijinañ, kentoc'h e servij an emstagan d'e vougañ. « Folklorachin » (n'eo ket hebban an dahsoù, med zoken kement a zo bet diaset ar vuhez, an oberintisoù (24) a-wechall) n'hell ket bezañ ewid ur gevridigezh (25) an arouez (26) a yec'hed.

### UR SKOL DIWAN E SANT-BRIEG

X Emaer o klask sevel ur skol Diwan ewid ar bahigou e Sant-Brieg. Ur c'homite zo : neb piw bennag a zo o klask mont e-barzh, ra skrivio da g Kristina Malfroit, 10, rue Rohannec'h St-Brieg.

Diouzh o zu, ar gerent a fell deza kass o bugale d'ar skol Diwan-se, n'o deus nemed skrivio da Arm. Boffred, 40, rue des Petits-Prés, 22590 Porzhig.

Komanantit da gelaouenn c'hallec an UDB

**Le Peuple Breton** (service abonnements \*)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez .....

Chomlec'h .....

a gass e gomanant

Boutin : 40 L (1)

Skoez : 60 L (1)

Estrenvro : 50 L (1)

(1) Divizet ar gerioù ne servijont ket

\* mention à préciser absolument

Amañ an arc'hant

dre chekenn-bost (1)

dre vandat-lizher (1)

dre chekenn-vank (1)

CCP RENNES 2365-76

Farsus eo gwelad ar re a ganvele (27), dog vloaz so, ar galloud-ijinañ (la créativité, l'imagination ou pouvoir bag ail) kenfortet bremañ gant ar gouelioù retro. An dud-se, gant sort memosoù en o fenn, ne soñj ket din e vefent gwall denn douch hol labour sewenadurel. An ideologiezh zo un dra klok, neketa ?

Fañch Kerrain

- (1) prostitution (2) amañ - horizon (3) s'approprié à nouveau le passé (4) la masse (5) des motifs commerciaux (6) je saisis (7) tradition (8) avenir (9) individu (10) réalité (11) suicide (12) groupe (13) illimité (14) imagination (15) plongeon (16) en danger, menacés (17) dans, cadeaux (18) inspiré (19) le problème (20) mélanger les concepts (21) encroûnement (22) fixation (23) le même sens (24) activités (25) société (26) signe (27) ceux qui chantaient les louanges de.

## PLURIEL...

Ur gelaouenn gwraet mad tre eo PLURIEL. An niv. 18 anezi (newez deuet er maes) zo gouestlet da VREIZH penn-da-benn. E galleg emañ peb tra : L'évolution politique du mouvement breton durant les années vingt (Alain Déniel). Racisme et antisémitisme dans le mouvement breton des années trente (Pierre-Jean Simon). Prêtres, nobles et paysans en Léon au début du XX<sup>e</sup> siècle : Feiz ha Breiz 1900-1904 (Fañch Eilegouët). Aux origines du nationalisme breton (buru telladenn levr B. Tanguy) gant Jean-Christophe Cassard.

15 L an tamm (Association Pluriel CCP Paris 20134 - 89 F). Pluriel, CoDRASEMI, 6 rue de Tournon 75006 Paris.

## Skol dre lizher « AR FALZ »

Bez ez eo Skol dre lizher Ar Falz unan eus skourroù pedagogel emsav Ar Falz (skolajerien ha kelennerien lañc Breizh), emsav diasetet e 1933 gant Yann Sohier.

Ober a raer gant al levr « Ar brezhoneg didorr », embannet gant Assimil da vezañ prenet ganeoc'h e ti ho levrier.

N'eus ket da baeñ ewid ar c'hentelioù, ur wech prenet al levr ha lakaet un timpr deoc'h war ar golo-lizher ma vo kaset deoc'h en-dro ho kentelioù difasiet.

Bez ez eus eus ar c'hentelioù en a fahz 11 poelladenn dra skrid, ma tenñ peb poelladenn d'ur rummad 7 kentel eus al levr. Labourad a ra ar skolidi peb heni gant e lañs e-hunan, buan pe goustadig 'vel ma kar. Arabad deoc'h ankouad kass bewech, gant ho poelladenn, ur golo-lizher, un timpr outañ, ha warnañ ho hanw hag hoc'h address.

Kaset e vez ar poelladennou en-dro dindan 10 dewezh epad ar bloawezh-skol.

Doare-kelenn etrerannyezhel, fonnus an notemoù ennañ, ez eo Ar brezhoneg didorr ur benveg dispar etre douarour kement heni, a c'houtad ar yezh pe o klask he deskiñ, hag a fell dezañ deskiñ komz, lenn ha skrivañ ar brezhoneg. Savet eo bet kentelioù brezhoneg Ar Falz ewid kement heni a fell dezañ en em varrekad war ar brezhoneg, forzh peheni e vez e barlant a orin, ma vez diaj un disterrañ tamm brezhoneg en e ziwskouarn. Ewid a re a greg da zeskiañ ar yezh, e c'hell ar gelaennier roñ dezo titouroù a beb sort m'o deus c'hoant mont donnac'h en ur rannyezheg. Arabad teuler a-gostez ar gwenedeg — ar pezh a vez gwraet re alies —, ur rannyezheg ken dibar he ferzhioù dezi. Pedet eo ar skolidi a zo o chom e-barzh lodenn vrezhoneg ar Morbihan (lakaet ar maes kantonioù Gourin hag ar Faoued) da zeskiañ da gentañ ar gwenedeg, ar rannyezheg a vez komzet tro-dro dezo. A-drugarez d'an doare-kelenn etrerannyezheg, ne vo ket diess dezo, war-lerc'h, stagañ gant ar rummad bras all a rannyezhoù, ha dont da vezañ barreg tamm-ha-tamm war ar brezhoneg en e bezh.

Ewid lakaod e hanw pe goulemñ titouroù all ouzhpenn skrivio da : Skol dre lizher Ar Falz Albert Deshayes, 15 Hent Bras Breizh 29000 Kemper.



« Meur a zoare zo da dec'houd kuit... »

Komanantit d'ar gelaouenn bolitikel nemeti e brezhoneg penn-da-benn

**Pobl Vreizh** (service abonnements \*)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez .....

Chomlec'h .....

a gass e gomanant

Boutin : 40 L (1)

Skoez : 60 L pe ouzhpenn (1)

Estrenvro : 60 L (1)

(1) Divizet ar gerioù ne servijont ket

Amañ an arc'hant

dre chekenn-bost (1)

dre vandat-lizher (1)

dre chekenn-vank (1)

CCP RENNES 2746-79

\* da verkañ dre red war ho kolo-lizher

**LENNIT  
POBL VREIZH**

# DAOU STOURMER BREIZHAD FTP

16

12 a vis Eost...  
An urzh a roer deomp troc'hañ ar gwez ha digoriñ an hent. Deuet ez eus ur c'harr-tan-samm d'hor c'herc'had ha d'hor c'hass betek un atat bras damdost d'Ar C'hastell-Nevez, war hent Plonevez-Ar-Faon.  
Pebezh laouenedigezh er gompagnunezh ouzh hor gwelad !  
Va faotred, al lodenn vrasañ anezo eus ar c'hontre, en em anavez an eil egile. Stagañ 'raont da skoñ an eil war gein egile, d'en em bokad ha da gontañ an darvoudoù.  
14 a vis Eost...  
Warc'hoazh vintin e kuitaan va c'hevenn niverennet an hent lañ, eus kompagnunezh Cartouche an FTP.  
An aotre 'm eus da vont da **Gastell-Paol** ha d'en el lakaad eno e servij ar stourm.  
Doaniet eo va c'halon, dreistoll o weled, o kledved va c'henedel emgann o lavared pegement a zoujalis, pegement a garantez va laoskan war va lerc'h.  
Abalamour d'an troc'h a oa etre hon oajou, ez ae va faotred, patrioted yaouank **Kernew**, betek kemer ahanon, betek sentiñ douzh va urzhioù evel ma vijen bet tad dezo, ha muioc'h c'hoazh martese.  
Reketiñ a ran dezo kendel'her da ren-tañ enor da vrogerourien Vreizh, kendel'her da vezañ ar wellañ skwer vev eus hor c'hassoni a-eneb d'ar spered nazi. Bez' e vimp trec'h heb dale : « **Bewet Cartouche !** ». Kemeret eo renevez va c'hevenn gant va c'henedel **Ar Gelleg**, **Kenavo!** Biken n'hoc'h ankounac'hain, paotred ar strouezh ! paotred ar viser !...  
Setu amañ ur c'harr-tan, un d-« traction » zù, divarc'het he dorioù diouti ; pewar emaoomp : va c'henedel **Alan**, ur bistolenn gantañ, **Gregor Drew**, ar bleiner, ur vitrailhetenn « **Stenn** » gantañ, **Taupin**, ur fusuil-mitrailh saos gantañ, ha nousep karger leun a gartouchennoù, ha me gant va fusuil-mitrailh « **Beretta** », am boa prenet digant va faourkaezh keginer **Kal-feter**, nebeud arag e varv.  
Klewet hon eus eo bet dieubet **Karaes**, **Montroales**, **Kastell-Paol**.  
Nemed tro-ober ez eus nousep bagad alamanet oc'h ober freus ha reus dre ar broioù ma tremenont enno. Lod anezo, ar re a oa a-hed ar mor, e **Hantenn Breizh**, en em zastum ewid pakañ porzh **Brest**. Lod all, eus kreiz-Breizh, en em vod war-dro ar **Menez-C'homma**. Wardro **Pleiben**, **Brasparz** ez eus krogadout etre paotred stourm **Karaes** (bataillon **Stalingrad**) hag ar bagadout alamanet-se.  
Setu e kavomp gwelloc'h tremen dre **Garaes**. Araog en em gavoud e k'ér, e rannomp chom a-sav ha diskouez hor pape-roù, hon « urzh-kefridiezh » roet deomp gant ar c'homanant **Bernard**.  
Aliañ ahanomp war an hent da gemer a raont : « **Ned it ket dre **Gerdjov**, ase ez eus bec'h ha tan. Na gemerit ket hent **Plonvel**, rag lakaet eo bet ar pont da darzhañ. Kit dre an hent-mañ-hent, hag en em gavfet e **Poulaouen** ».**

Sed en em gavomp eno wardro kreisteiz. E-kreis ar bourk emma bodet an dud, deuet da gleder ar c'heleier. Chom a raomp a-sav. Daoust ha piv a oar un dra bennag diwarbenn **Kastell-Paol** ? Den ne oar respont. Re bell emaoomp c'hoazh, rag, dre n'eo bet troc'het neudennou ar bellgomz, ne oar an den nemed ar pezh a dremen en e vro, pe er bourkoù tostañ.  
Ne gollomp ket hon amzer memestra. E ti ur c'hemener e prenomp beb a vrec'henn FFI-FTP.  
Buan ez a ar mekanik en-dro. N'eus dale ebet. Pront e vo muioc'h a FFI ewid a FTP... N'eus forzh, laouen eo an dud o weled paotred ar strouezh, tud yaouank eus o bro, o'n em gannañ da gas kuit an alouberien viliget.  
E kement lec'h e vez kenniget deomp da zebrñ ha da evañ.  
Loc'hañ a raomp adarre, ha dre **Bieber-Krist**, **Sant-Sew**, eh en em gavomp e **Penez**.  
Krenañ a ran gant an aon da gleder keleier fall.  
Kentañ ma welan, en ur ziskenn eus hor c'harr-tan, e-kichen ti **Roguez**, eo **Saig-ar-Sann**, bleiner ar c'hiri boutin, hag a ra marc'had **Kastell** beb meurzh, anaoudegezh vras deomp.  
Lammad a rcomp warnañ. Komprenet en deus buan eus pelec'h e oamp o tont hag ar pezh a oamp o klask. Ne ro ket amzer din da c'houlenn keloù, ma lavar din : « **Selau**, Yann, o paouez gwelad da c'hwreg gant he bugale emañ. E **Plouehan** emaint, e ti **Job Derrien** ».  
Pokad a ran dezañ. **Trugarez**, o va Doue !  
Biskoazh brassoc'h lewenez ! Beuzet eo va c'halon a laouenedigezh. Allas ! Klewede a raomp da c'houde an darvoudoù spontus a zo en em gavet e **Kastell** : fusuilhet ar maer, gant ped all a dud !  
**Alan** n'eo ket disourset : ne oar sort diwarbenn e familh. Eomp da gentañ da **Blouenan**. Lammad, daoulammad a ra va c'halon dre ma tostaomp ouzh straed ar **Bara-Benniget**.  
Klewet he deus ar c'harr-tan o chom a-sav ? Pe, martese, un dra bennag, kuzhet buzhomp, en doa lavaret dezi ?... Ha neuse ! Ouzhpenn na vije ket bet ar wech kentañ, nag ar wech diwezhañ.  
« **Yvonne !** En em gavoud a res kement-se ! » — « **Ouzh da c'headal edon** », eme va gwreg **Yvonne**, a-vec'h ma tigoran an nor.  
Hag hi o'n deuler warnon en ur ouelañ : « **Gouzoud a ouien e vefes deuet hiziv. Setu amañ hor bugale : **Andrea**, **Mari-Jose**, **Ivon**... Renan zo chomet er gér da studian ».  
« **Trugarez**, **Yvonne** gaehz... En dilerc'h eus va buhez ne'm bo ken brassoc'h plijadur. **Trugarez**, o va Doue ! O kennig koll va buhez eo 'm eus he gounezet. Ha te, **Yvonne**, va fried... karantezuz, digarez ahanon ewid ar boan a'm eus gwraet dit, o vezañ da laosket da hunan gant da vugaloù ».**

REPUBLIQUE FRANÇAISE

N° de l'inscription

Mois 26-33

MINISTÈRE D'ÉTAT

chargé de la Défense Nationale

BOUR-DIRECTION DES BUREAUX DU CABINET

BUREAU DES DÉCORATIONS

Loi du 4 février 1933 (J. O. du 5 février 1933)

**CROIX DU COMBATTANT VOLONTAIRE**

1939-1945

Par décision n° 3.009 en date du 13 juillet 1970

Membre au port de la Croix du Combattant Volontaire a été reconnu à

Monsieur **J. B. DEURFF** Jean-Baptiste, Auguste

né le 25 février 1901 à **PLORIGNAN** (Finistère)

À Paris, le 13 juillet 1970

Le Ministre d'État chargé de la Défense Nationale

Signé : **DEBRÉ**.

POUR AMPLIATION

L'Administrateur civil hors classe **BERT**

Chef du Bureau des Décorations

Abaoc taol **Kroas-ar-Born**, ma oa bet sammet ewid bezañ lazhet **François-Louis Sallhour** ar marichal hag e geniled, setu wardro ur mis ma'z omp chomet, ma gwreg ha me, heb kelou an eil eus egile.



Yann-Vadezour an Deuñv, e dog gantañ war e benn, o kontañ e begement da barson Kastell, lakaet nec'het (ewid doare) gant ar Skritell a weler ouzh tour ar C'heiskêr.

Kontañ a rae **Yvonne** din ar boan-spered hag an tourmant a vire outi a gousked... Dihuniñ a rae heb ehan gant ar « soñj », gant ar « boan » e oa ar Gestapo o lakaad tachou dezi en he daouarn, o tennañ hec'h ivinnoù diouti... peadra da vont da sod !  
« **N'ouzon ket penaos ne'm eus kollet va skiant-vad ! Gwir eo emaoût ase », emezi, he frontelloù o tigorin ganti diwar ar joa. « Da c'hwes a santan, c'hwes va gwas ! Hag ouzhpenn, c'hwes an anveleed gouez ac'h eus bewel en ho zoues. War c'hoazh ez da z' tilastezañ !... Med deus tostoc'h ouzhin c'hoazh, ma chomo ar c'hwes-se pell ennon ».  
Selled an eil ouzh egile a raomp, e-gis bugale, heb mont skuez. Heñvel douzh daou den dall renevezet dezo ar gwel, roet dezo ar gwel, roet dezo a-never ar skleriñ bet kollet ganto.  
Ne chanomp ket da varvailhad ar goustatañ ma c'hellomp, en aon da vired douz oll dud an tiegezh a gousked. Ne skuizhan ket o kledved he mouezh o tisplegan din an darvoudoù spontus en em gavet e **Kastell**, ha penaos, dre c'hrass Doue, o deus gallet, hi hag he bugale, **Renan** dreistoll, chom bew.  
« **Ped** gwec'h, emezon, e stardas an enkras va c'halon din, nos ha deiz, o vezañ ma oan heb kelou ahanout ! Kement a fallagrezh hag a walleurioù o deus laosket war o lerc'h an Nazied viliget, diwargoust ar stourmerien dreistoll. Pa ne ves ket paket an tad, e vese sammet ar mab, ar c'hwreg, ar vamm... hag an tan en ti ewid ac'hañ. **Trugarez 'ta**, va Doue, ewid ar blijadur a'm eus hiziv, o vezañ tremenet hebiou kement a zarvoudoù, kement a drubuilhoù... Kouskomp bremañ ur pennadig, va muiañ karet ».  
« **Ne c'hellomp ket ?... Mad !** Diskar-gomp neuse hor c'halonou eus o oll enkras ewid o c'harzañ a lewenez ». « **Lewenez** ar garantez, kerañ tra bet roet da vab-den. Heñji 'eo ar vuhet nemed ur c'hezhigell karget a awel, didalvoud ».  
« **Grit 'ta**, va Doue, ma chomo an dud a-sav d'en em lazhañ. Degasit muioc'h a garantez war an douar ».  
**Grit**, o va Doue, ma kompreno an den pinvidig eo breur d'ar paour, ha, mard eo e vreur paour, eo abalamour m'o deus ar re binwidig laeret e boan. N'eo ket an alusen emao o c'headal, med ar pezh a zo e gwir ».  
Un tamm mezh hon eus o vezañ ken eurus e-toues kement a walleurioù hag a dristidigezh, kement a dud doaniet.**

**Paperenn ewid gouenn mont e-barzh UDB**

Hanw hag hanw-badez .....

Chomlec'h .....

Gouenn a ran moned e-barzh Unvaniezh Demokratel Breizh

D'an (d'ar) ..... 19

Sin : ..... Da gass en-dro (troc'het pe adskrivet) da UDB B.P. 304 - 29273 BREST-CEDEX

Un nebeud bloazehioù a dremenas hag ez eo en em gavet ar peuc'h.  
Un dewezh e lavaras din **Yvonne** e-gis-se : « **Soñj** azh peus eus da zistro eus ar « **maquis** » ? Ken eurus edomp, ma 'm boa gwraet ar bromessa mont da birc'hinañ, hon daou, war hon troad, d'ar « **Salette** ». Ne'm boa ket gouennet da avis diganes, sur ma edon e oas er memes soñj ».  
« **Ur burzhad all eo kement-se !** Gwraet hon oa an heveleb promesa !... **Mad !** Warc'hoazh kentañ ez omp da birc'hinañ ».  
**ACHU**  
Yann-Vadezour an Deuñv

# ADLODENNAÑ PE DILODENNAÑ ase ema an dalc'h !



Penaos en em c'houdoriñ pa vez awel fall.

Ewid tud zo, n'eus netra vad da lavared diwar-benn an adlodennañ. Ewid lod all, n'eus netra gwelloc'h. Kredapl a-walc'h ema ar wirionez etre daou. Med neuse, petra a vez rebechet gant lod ? Kalz traoù, ewid doare. Da gentañ, dre ma 'z eo un dra reaz herwez al lesenn bet sovet e 1941. D'an eil, dre ma 'z eo un dra goustus ewid ar beizanted. Ouzhpenn-se, dre ma vez toalet re a gleuzioù d'an traoù gant ar mekanikoù ; ar pezh a laka, herwez lod, an amzer, an douar, an dour hag all da chañch a-grenn, hag a laka hon bro da zont da vezañ heñvel-mil douz ar Beauce, pa ne vez ket un deserzh sech divalaw epad an harv hag ul lenn bras epad ar gouviñ. Ur rebech all c'hoazh : garet e vez kement-se ewid kass ar beizanted kuit, ha tapout o douaroù diganto ; roet e vo ar re-mañ goude-se d'un nebeud labourerien-douar pinwidig, atantou bras deho dija, hag a va leo dorn-ouzh-dorn gant al labouradegoù hag ar c'hevredadoù-kenwerzh kapitalour. Ha daoust hag-efv ez eo gwir toud an traoù se ?

Roudennoù a vez kavet deus an adlodennañ en istor a-wechall. Med red eo gortos ar bloaz 1941 e Bro-C'hall neuse dindan dalc'h an Alamanted, ewid gwelad an traoù bezañ reolenet dindan ul lesenn. Tamallet e vez da homañ bezañ red ha diseñt. Red eo d'an dud, gwir eo herwez al lesenn, plegañ d'an adlodennañ pa 'z eo bet digoret gant ur skrid-embann prefedel. Gwir eo iwe e vez stard an traoù penn-da-benn, ha gwelloc'h eo sur d'an dud lavared o soñj e poant, hag en em zifenn zoken, ma ne fell ket deho bezañ enkouac'haet a-wechou. Med, e gwirionez, pa vez sewenet al lesenn en he fezh, ez o an traoù war soplrad dre ma 'z oer ganti. Da gentañ, ne zeu ket skrid-embann ar prefed er-moes a-daal

trumm. Diviset ha goulennet e vez an adlodennañ gant ar c'husul kumunel d'an nebeutañ. Alies zoken, hemañ a gav gwelloc'h ober ur referendum a-toeus tud ar barres. Pa 'z eus bet votet er Parlamant, e mis Gouere 1975, un nebeud chach-mañchou d'al lesenn 1941, ez eo bet goulennet gant kamaded an tu a-eneb d'an gouarnamant na vije ket garet ken adlodennañ ebed heb ur referendum a-raog. Med chomet eo o goulenn heb respont betek-henn. Pa vez bet boulc'het ar jeu, e vez roet tro d'an dud da roiñ o ali meur a-wech, e-gis m' hon eus gwelet dija, gant an enklaskoù, ar bruderezh war ar journalioù ha mogerioù an tiez-kêr. An douaroù zo da vezañ renket e rummoù, ha lakaet e lodennoù newez, gant sikour ewezhieq an oll berc'henned ha labourerien-douar, pa vez kosset an traoù en-dra evel m'eo dleet. Ma ne vez ket roet e lod d'unan bennag herwez e c'hoant, moian 'vez dehañ goulenn mont dirag ar c'husul-adlodennañ kumunel ha departamantel, heb paeañ netra, ha goude-se, dirag al les-varn veles-tradel. Ya, brow eo an dra-se, emi-hu, med c'hoarjet e vez ar jeu dija a-raog etre ar mentrouz hag ar c'husul kumunel gant bennozh an DDA. Eveljust, ma ra ar mentrouz e labour heb ali ar c'husul hag an iskusul adlodennañ (ugent peizant d'an nebeutañ), ne vez nemed un den da ziskar ha da deuler kuit. Med ne vez ket gwelloc'h, kennebeud pa vez tud ar c'husul o klask kargañ o godelloù ha re o c'hama-raded, en ur skrapañ ar gwellañ douaroù. Brow eo neuse d'an dud all bezañ war ewezh, ha sevel ur strollad-difenn zoken, ma vez red. Lod a vez spouronet kerket ha ma klewant hanv deus ur strollad sort-se. Pa 'z eo savet hemañ ewid difenn un dra a-boues, ha pa 'z eo prest da glask da

vad un diskoull reizh d'ar c'hudennoù, piw a damallo ? Ne ra nemed heuliañ reolennoù an demokratelezh wirion. N'eo ket heñvel ken evelkent pa vez sovet ar strollad netra nemed ewid ar blijadiù da vezañ a-eneb da fozh petra, pe ewid difenn gwirioù-dreist ha gouind bras hennemoù. Forzh penaos, ral eo e vefe ar gwellañ tra kass ar CRSSed da vougañ an tabut, nemed sklaer mad e vefe ar jeu d'an oll. E mod all, kalz zo da bariñ e savo muioc'h a vec'h c'hoazh goude-se.

Kliewet e vez alies e vefe gwelloc'h ober gant an eskemmoù dre emglew e-lec'h an adlodennañ. Er mod-se e vez chañchet an douaroù etre an ameseien er c'houlz hag en doare ma karant. Garet e vez dija gant an eskemmoù dre emglew, e gwirionez, ha roet e vez zoken ur skod a 80% ewid atizhañ aneho. Med mont a raont mad en-dro etre doue pe dri perc'henn hebken. Un dra vad eo sur, med e korn-broioù zo, e-lec'h ma 'z eo gwall gemmesket al lodennoù, n'eo ket a-walc'h, na tost. Beb gwech ma 'z eus bet esaoet ledannañ an eskemmoù dre emglew war ur barres a-bezh, pe ul lodenn vras anez d'an nebeutañ, ez eo bet padet an traoù pell a-walc'h ; ranket ez eus bet a-wechou zoken, a-benn ar fin, ewid sioulad an dabuterien ha klask un termen, sevel ur skrid-embann prefedel, ar pezh a laka an traoù da dostañ douz da vezañ kosiant ken ker hag an adlodennañ, ne vadont ket an douaroù ken koulz hag hemañ, ha ne vez ket ken aes ober al labourioù evel an hentchoù, ar gwazhoù hag all, war a lerc'h. Med koulskoude, ma n'eo ket possibl gortos digant an eskemmoù dre emglew kement ha ma fallfe da lod kaoud, rag fizioù da raont hebken e balotez vad ar perc'hennadur prewez, ar pezh a zo

riskus ha touellus a-walc'h, diskouez a ra an doare-se memestra un hent talvoudus d'an adlodennañ. War an hent-se e tivis an dud etreso a-raog chañch o farteier, e ro an oll o ali, e vez dalc'het kont deus c'hoant peb heni, e vez sioulaet an trous ha garet un dibab a-benn ar fin gant ur strollad a dud onest, skianteg ha fiziet eno gant an oll. Neuse, epad un adlodennañ garet gant ur sort spered, ne vefe ket plass ebed ken da deknokrated ollc'halloudeg a c'hell chom pell diouz an dud, da ventrourien a c'hell bezañ prehet o c'houstiañ deho gant arc'hant ha prejoù mod, da bennou bras ar barres pe ar c'hanton a c'hell klask o enor a-raog mod an dud, ha da beizanted binwidig ha disonest a c'hell en em silañ er c'husul-adlodennañ ewid kreskiñ ha gwellañ o douaroù diwar-goust ar re vihan hag ar re van.

Un dra all hag a vez rebechet d'an adlodennañ : gwall goustus eo, d'ar gevredigezh a-bezh koulz ha da beb perc'henn ha da beb labourer-douar. Gwelat hon eus dija pegement e koust an adlodennañ gant al labourioù a va da heul. Ewid keñveriañ ar prisoù roet gant ar gouind a c'heller tennañ deus an adlodennañ, e vefe red sellet tost ouz e fedoù skomikel hag ober kontoù spis. Med penaos 'ta disparitezh mod efedoù an adlodennañ diouz re an traoù all o deus c'hoarjet o jeu iwe war c'hoarjetou pe gollou peizanted hor bro e-pad an deg pe bemzeg bloaz diwezañ ? Diaes tre eo, rag, e-toeus an traoù-mañ, e kaver mesk-hesk implij fonnus ar mekanikoù-dre-dan da arad, da hadañ, da c'hwinnad ha da zastum an east, al lousoù hag al ludu, an doareoù newez da labourad an douar, ha da sevel loened e bandedoù niverus gant boued deuet deus lec'h all ; hag arabad ankouac'haed efedoù ar c'henwerzh garet war frwezh al labour-douar gant ar c'hen-sorterezhioù hag an embregerezhioù bras, na kennebeud leweson ar reolennoù savet gant ar C'henmarc'had boutin european. Tu zo memestra da lavared en deus bet an adlodennañ an efed ekonomikel a dalvoud-gezh war al labour-douar, en ur lakaod da c'hoarjet kalz amzer, dre verraod ha gwellaod an hentchoù, ha dre greskiñ ha bodañ an tachennoù douar bihan ha strewet amañ hag oñt. Bihannaet eo bet iwe e gis-se an arc'hant implijet gant ar mekanikoù ewid paeañ ar fuel dewet hag ar pezhioù uset ganto. Aesaoet eo bet o labour da galz o dud c'hoazh. Penaos lakaod toud an traoù-se e sifroù ? Kroget eo ar glaskerien war an ekonomiezh, e-barzh Skol-Uhel labour-douar Razonn (ENSAR) da jedif pegement o c'hoarjet a vez degaset gant an adlodennañ e hunon. Ewid-se eo bet

## Bodadeg-Veur Ar Falz

Chañch a ra ar blienier, med kendel-c'her a raio AR FALZ gant he hent. Dalc'het eo bet Bodadeg Veur AR FALZ er Roc'h Velen e Plouganou, d'an 8 a vis Gwengolo ; deuet e oa ur c'hant bennag a stourmerien, e hanv war-dro daou-e-hant a isili.

Herwez danevell ar sekretour meur Per HONORE, e kendalc'h embannadurioù SKOL VREIZH da vezañ yac'h, peogwir ez eus bet embannet, ar bloavezh-mañ, ouzhpenn ar gelaouenn (da skwer an niverenn diwezañ, gouestlet da Dristan hag Isold), 12 200 skwerenn eus al levrioù. Menegomp ar « 6 Kontadenn », e brezhoneg aes, « Le breton à l'école », ewid ar skolioù kentañ derez, hag ur gelaouenn newez oll-vrezhoneg Planeadenn ; hep dale e teuto er maes ur bladenn 45 tro, kanet gant Kristen NOGUES skoazellet gant TALBENN, ewid ar vuigale. Ar gelaouenn Ar Falz zo bet deuet er maes ingal, hag ewid pezh a sell ar stourm, he deus labourer AR FALZ dreist-oll e-barzh an Talbenn Sewenadurel ; ema e soñj sevel un dewezh bras e penn kentañ ar bloavezh-skol.

Ewid amzer da zont ar strollad, e ro kendalc'het gant an hent bet kemet bloavezhioù zo, da lavared eo kenlabourad muioc'h mui gant an oll re a stourm ewid ar sosialism. Goulenn a raio AR FALZ mond e-barzh ar F.O.L., klaskañ a raio kaoud darempredoù gant an oll sindikadoù ha strolladoù eus an tu kleiz. Ouzhpenn-se e skozello AR FALZ stourm Skol an Emsav ewid ar cheknaoegoù e brezhoneg. Un nebeud mennadoù zo bet votet, en o zoues unan o c'houlenn ma vefe gzaet, gant an administrasion, bruderezh ewid kelennadurezh danvez Breizh e skolioù derez kentañ, hag iwe ma vefe



broudet ar skolaerien da gelenn brezhoneg.

Epad ar vodadeg-se o-deus diskouezet tud AR FALZ o youl da gentlabourad muioc'h-mui gant an oll strolladoù a gleiz ewid ma vo roet da labourerien Vreizh ar gwir da vevañ bemdez en o c'hultur.

War-lerc'h an emvod ez eus bet savet ur burew newez : lezel a ra Per HONORE e bluss gant Paolig KOMBOT e-gis sekretour-meur, goude bezañ bet epad 10 vloaz e penn ar strollad.

AR FALZ/SKOL VREIZH : L. Plassenn ar Marc'hallac'h - MONTROULES.

lakaet ganto keñver-ha-keñver deg parres bemzeg bet adlennet et Mor-bihan, e-kichen an Oriant, ha kement-all n'int ket bet gwaret betek-henn, er memes kornbro. Herwez o studiaden, deuet er-moes un nebeud misioù zo, eo bet kresket pinwidigezh al labourerien-douar, e parresioù adlodennet aboc'e c'hwec'h pe seizh vloaz, muioc'h ewid er re n'int ket bet : war-dro

deg gant muioc'h (10%). Noc'het e vo martese talvoudgezh an enklask-se gant lod, med red eo ansav e seblant bezañ bet garet gant kalz a ewezh, pa weler niver an dud a zo bet goulennet diskleradurioù diganto, da lavared eo tost da zaoù vil labourer-douar, hag ar mod ma 'z eo bet kosset en-dro, rag peblenn zo bet gwelet er gêr gant un enklasker.

### AR FALZ

kelaouenn drimiseq an Emsav diazezet gant Yann Sohier, bodet ennañ skolaerien ha kelennerien Vreizh a-dud gant ur skol vrezhoneg ha laik gwirion  
Lennit Ar Falz ! Komanantit d'Ar Falz !  
AR FALZ, Str. Kan-Ar-Gwez - 29245 PLOURIN-MONTRIOULES  
KR.P 430 20 H ROAZON

### AL LIAMM

ar gelaouenn nemeti o ruiñ, 6 gwaz ar bloaz barzhonegoù, kontadennoù, pennoù a beb vort ha keleser 80 paenn e peb niverenn - Rener : Ronan Huon  
komanant : 50 L - Studerien : 35 L  
Teizorer-meurour : P. La Bihan - 16, rue des Fours - Chaux  
ST-SERVAN 35400 ST-MALO - CCP 5349 06 PARIS

# AN TOMMER-DOUR

Er Vro-Plin (tro-dro da Sant-Nicolas beteg harzoù ar brezhoneg wardu ar Sav-Heol, ha beteg Bro-Gwened warzu ar C'hreisteiz) emaoamp e Kernew-Uhel. Tud ar Vro-Plin o deus chais, rag ur radio brezhoneg ewite o human o deus : Kasetenn ar Vro Plin. Enrollet e vez danvez ar gasetenn-se war vandennoù, gwraet kassedigou gante, hag e c'hell ar re-mañ bezañ klewet war un soneroller pe magnetofon. Abaoe ma n'ema ket ken oc'h ober wardro lod eus abadennoù brezhoneg FR3 Brest, eme Rene Richard oc'h ober wardro Kasetenn ar Vro Plin. E Laruen eme Rene Richard o chom, da laret en e vro, er Vro Plin.

Ar vadelezh en deus bet Rene Richard da gass da b/Pobl Vreizh ur pennad-kaos skrivet gantañ :

« Setu ur pennad-kaos am eus bet tennet deus niverenn diwezañ Kasetenn ar Vro Plin (niv. 16), war-sujed un tommer-dour dre an heol hag a zo bet staliet n'eus ket kehid-se zo gant ur munuser deus Laruen, Hubert Pampanny.

Skrivet 'm eus ar pennad-kaos-se tost awal'h deus ar stumm komzet gant HP hag e wreg (Anni Gwene-goù).

'Po ket med laret din ma plija deoc'h ar stumm-se da skrivo, hag an danvez.

Ahendall, zo moian da reiñ deoc'h kontadennoù ha traoù deus an amzer gwechall... Med gwelloc'h 'm eus kavet lakaad un tamm deus ar vuhez « modern » hidu an deiz.

'Wid ar stumm da skrivo, 'soñjan 'talvo da galz a dud 'wid 'n em lakaad da gomz, kar ase 'm eus skrivet lesonnoù (pe : tesennoù) na vezont ket kavet bal levrioù... Chahchet zo bet stumm a-wechoù :

« kerzed, kerhed, kerhad, kerhat » (kerzhoud).

Ar brezhoneg kuit da vout komzet n'eo ket ar brezhoneg eo... 'gava ket deoc'h ?

Peb unan 'gomza ha e vod ha meump ket 'med se ken 'wid reiñ liv d'hon yezh : ha desko komz, ase 'ma toud !

Kustum 'vez an nen da lenn, ha dre lenn ar stummoù komzet eh arrou kerroc'h da gomz marsen...

Se 'soñjan bremañ, deoc'h da weled... Gant ar gasetenn bepred, zo moian da heuilh' ar pezh 'vez laret ha da lenn war un dro.

Ha gant se...

Boñ ! Trawalc'h 'm eus laret ha n'on ket 'wid harz a skrivo 'vel 'komzan... Setu 'maon stard 'walc'h da lenn marsen ».

Rene Richard : Un tommer-dour eo bepred.

Hubert Pampanny hag Anni Gwene-goù : Ya, ya.

R.R. : Hag unan 'spessial... N'eus ket afer da vraficho 'nehañ... brañcho 'nañ war an elektrissite... 'Wid sikour... ?

H.P. : N'eo ket, n'eo ket... pa n'eus ket heol, neusen 'domma ket ive.

A.G. : Hennezh 'gomanda 'nehañ :

ma 'peus c'hoant, ma 'vez ket tom-met 'walc'h an dour gant an heol, n'a ket dour bar « chauffe-eau ». Ha pa vez tomm 'walc'h, hennezh a deklañcha ha 'gema an dour tomm.

R.R. : A ya ! Med nag ewid-se, ma vez tomm awal'h an dour da nos, 'gerzha ket an elektrissite na...

H.P. : A nann, nann... An dour 'choma tomm 'barzh.

A.G. : N'eus ket forzh penaos, 'gerzha ket gwech ebed war elektris-site : 'vez tomm pe 'vez ket, 'pezh 'vez tommet, 'vez tommet gant an heol.

H.P. : ...choma tomm 'pad un tropad deziou...

A.G. : Pa vez brow... pa vez daou pe dri dez brow, ma 'peus c'hoant... ar pod a ra... ha kehid ha 'vez tomm hennezh, 'm bez dour tomm, kehid ha pada, yena ket, hennezh zo isolet ha toud, 'vel ur « chauffe-eau », memes marsen muioc'h 'wid ur « chauffe-eau »-all... yena ket, en mod 'bed, kehid ha 'vez brow an amzer, 'pada, mod 'bed, kehid ha 'vez brow an amzer, 'pada.

R.R. : Ya, ha 'baoc pegehid 'ma 'kerzhez 'gis-se ?

H.P. : 'Baoe komañsamant an hañv.

A.G. : Pe marsen memes mis Mae, 'baoc 'n deziou 'oa bet tomm-tomm-tomm ase. Ur mare oa bet ha 'oa bet tri dez tomm ase, ha 'n tri dez-se 'oa laket, peogwir 'oant daet espres da lakad 'nehañ pa oa brow an amzer.

R.R. : Ha implijet 'peus an dour, neusen ?

A.G. : Ya 'vad !

R.R. : Ha 'oa tomm ?

A.G. : Ya, tomm 'vez, moian zo deoc'h da selled peogwir hidu 'ma brow.

R.R. : Ha 'gousta ket ker bremañ ?

H.P. : 'Gousta ket mann 'bed !

R.R. : Med marsen 'oa ker da lakad ?

A.G. : Ya, da lakad eo ker 'walc'h.

R.R. : Ha 'baoc pell zo 'poa soñjet ba se ?

H.P. : O ! Pas gwall bell zo, med arrou oomp da drañformo an ti ase... Ha vo brassaet un tamm... gwraet ur gamp 'us d'ar garaj... ha 'n doenn zo bet difreuset ha moamp soñjet adober ha lakad ar « panneau » 'barzh.

R.R. : Neusen ar « panoioù » zo bet laket ban doenn ?

H.P. : Ban doenn, ya.

R.R. : Ha 'vezont ket gwelet deus an diavaes ?

H.P. : Ha geo, gwelet 'vezont deus an diavaes, med 'vez ket gaeret peira int... Boud zo tud hag 'kava dehe eo ur frenest eo.

R.R. : Stumm ur frenest un tamm.

H.P. : Ur frenest vihan 'vez laket ban doenn.

R.R. : Ha neusen 'vez tommet an dour ase gant an heol ; ban doenn.

H.P. : Ya, so... an tommer-dour neusen zo ban diabarzh, ha 'kreis etrede o daou zo un « transfert » ha hennezh 'gomanda ar « circuit ».

R.R. : Hag an dour 'ha deus an eil d'an all ?

H.P. : Ya, ar « circuit » zo serret, ha pa vez tomm, hennezh 'laka an traoù da gerzhez ha pa yena neusen, 'troc'ha ar « circuit ».

A.G. : Ar machin d'ober vessel 'm eus brañchet warnañ bepred, ha 'welan 'talva din, kar ar vessel, 'kava

## Brezhoneg ar Vro Plin

A-ramp eme brezhoneg ar Vro Plin war veur a rannyezh. Tennañ a ra da yezh Oueloù ewid traoù zo, da heni Wened-Isel, kalz, hag e Kernew eme memestra ar Vro Plin. Pell mat eme yezh ar Vro Plin diouz heni Leon (lokomp Lokourann) ha diouz heni Gwened-Uhel (lokomp Sant-Eleustr).

Lod a laro eme unvanet awal'h an oll vrezhoneg gant ar gerioù galleg stank a gaver e parlant pennaeg ar bobl... Komz a ra ar bobl brezhoneg pa ne c'hall ket ober modall : arabad ankouvad n'eus ket a skol vrezhoneg ewid Breizhvels ar maosio nemed war varienn o mammoù.

Perzhioù dezi he hunan he deus yezh ar Vro-Plin memestra. Dezi he hunan, pe war un dro gant Gwened-Isel

— an dibenn-e stank meurbed en 3<sup>e</sup> gour an displegadur dibersonel : 'domma ket, 'gomanda, deklañcha, 'gerzha ket, 'choma, pada, kava, 'gousta...

— an dibenn-e ewid infinitiv ar verboù. N'eo tamm ebed un distogadur eus -añ (Trager) pe -iñ (Gwened). Un dibenn oll eo, ken kazh, ha martese koshoec'h, ha ken « enorus » sur mad skrive, da vraficho, da drañformo, tomm...

Evel e Kernew-Uhel a-bezh, e talv fonnes kement ha buan, fonnabl 'lec'hall. Goaret = gouezet, gouezet, gouiet... Afer = ezomm, dober.

Doou c'her zo bet skrivet en ur mod muioc'h lec'h martese :

— ur frenest. E KLT e kaver ur frenest, e Gwened, ur frenestr. Er Vro Plin ha eus ur ger « etre » gant frenestr. Aes eo da gompren ar peraq hag ar penaos eus kement-se. Memes mod 'ma kont e Kernew-Uhel gant ur ger oll. Ar ger leoneg mager zo mager e Gwened ; Kernewvels a ra gant mager, a vije ar stumm rezh ewid KLT a-bezh (Memes mod ewid gant ledoer KLT, ledoer gwenedeg).

— Ober a ra ul lodenn deus Kernew-Uhel hag an iselwenedeg ive gant ar stummoù e -sao. Stummoù rezh, doost ma n'ini ket kan sligmet hag ar re a zo e -sao. E-tal martese/marsa, e kaver e Kernew-Uhel martese/marsen (an heni kavod a roer ive neusen (neñ) e Koroes), kavod a roer ive neusen (neñ) e Koroes]. Arabad komz eus trefeoù : yezh ar Vro Plin a dail unan oll, hag outgenn he deus un do-voudegezh dezi he hunan, o vezoñ n'ema o c'hoalod war an oll rannyezh, pe dost. Ur perzh mad all he deus yezh ar Vro Plin : ne vez ket berret kement ar gerioù emañ ha ma vez gwraet e kornioù all eus Kernew, frazch e ristig tud ar vro a brezhoneg. Ar re a zo o klask goud hirroc'h n'o deus ken « med preno kasse-digou Kasetenn ar Vro Plin, ha ma ne orant ket c'hoalod ar brezhoneg-se, he a welo pegen brow eo. Neusen, ewid kement-se skrivo da Rene Richard Kerjann 22480 LARUEN » (o zo Lan-vaïn e galleg).

H.P. : A nann, nann, nann. Sur-toud me zo un den deus ar jeu un tamm.

R.R. : A ya 'wid ar biljadur eo.


H.P. : A kasi 'walc'h ya. Se blija din.

A.G. : Ha Michel Velly zo bet 'n em okupet mad iwe ha setu...

R.R. : Hag ur biljadur eo gweled 'nehañ 'kerzhez, sur 'walc'h !

H.P. : A ya ! 'Ra ket kalz a drous, med treiñ a ra memestra !

Kelouennoù brezhoneg : AL LIAMM, savet 35 bloaz zo : o tont er maes beb 2 vis kom. bloaz : 50 L P. Le Bihan CCP 5349 06 A Paris.



BRUD, deuet da vezañ BRUD NEVEZ 2 vloaz so. O tont er maes beb mis 1 kom. bloaz 50 L - P.M. Mevel CCP 61493-55 Roazon.

Mab-kaer d'ar roue : eur marvail gant Eostig Kerineg

le Gouic

TELEPHONE

RADIO - U.D.B. Tel. (16.98) 80.18.47

PLANEDENN

BRUN-ANZER 1979

PLANEDENN, lost an ti, ar bidoc'hig, newez deuet er-maes an niv. 1 anez. Da zont er-maes beb tri mis. Kom. bloaz : 50 L - I. Gourmelon CCP 1988-54 P Roazon.

# CHOULAS HA FIN, AR BOÏGARSON...

« Choulas » gant tud kreis Kernew a dalv kement ha « pilpous » e brezhoneg bras. Ur « goulenn a vil lur newez » : piw eo ar choulasañ hag ar finnañ e-touesk ar re a zo e penn an traoù ? Jiskar ar boïgarson an heni eo. Hemañ en deus kavet ar mod, an tu, an doare da dremen lost al leue dre c'henoù an dud, ha goud a oar chom heb c'hwitañ war e daol. War e daolioù kentoc'h, rag beb tro ma c'hell (hag ez eo bras e c'halloud), e teu da c'hlaboussad dirag an dud, ken e vezont strobinnellet gantañ. Ur paotr fin, a-dra-sur...

Mar kreder Pennrener ar Stad C'hall, ne vez ket renet ur bobl en ur liwañ gewier dezi. A zo braw da lâred. Mes ar c'hontrel bew eus ar pezh a vez gwraet eo ar c'homzoù-se. Rag ur mailh, unan deus eus ar re ampartañ da ren ar Frañs dre ar gaou ha dre ar pilpousserezh eo ar President. Gewier pa lavar, evel en deus gwraet d'ar 17 a vis Gwengolo, emae oc'h ober strivoù ewid ingalañ an diouveroù. Farsour bras ! Penaos krediñ ar choulas pa weler pinwidigezhioù lod lakaet muioc'h-mui war wel ? Penaos henn krediñ pa vez embannet a-berzh Stad ez eo kresket c'hoazh an troc'h a gaver ar re a zo paeet herwez ar SMIC, ha gounidoù bras meurbed lod eus ar re all. Penaos henn krediñ pa ouier, diwar vremañ dija, e vo kresket eus 150% tailhoù ar re vihan hag ar re grenn, e-keñver tailhoù ar re a zastum arc'hant a roselladoù bras ? Gewier a liw deomp ar boïgarson, pa lavar c'hoazh ne gresko ket bec'h an tailhoù war gein an dud e 1980.

Ur mailh, ya. Ur paotr fin, spered bras ha hir dezañ, ewid hor brassañ gwall. Unan hag a oar mad peheni eo poues ar c'helaouiñ (skinwel, skin-gomz), hag a zo aet pelloc'h c'hoazh war ar c'hontrollañ eus ar binwioù-kelaouiñ-se. Ur gevridenn.

Dre achanterezh ar gerioù e teufe ar boïgarson a-benn da doñvaad ar gouezañ loened zo. Rag, war boues hor fri e vezomp kasset digasset gantañ, 'vel tiriwi minellet. Ha ma 'z eus traoù diaes roiñ anehe da c'houde d'an

dud, e vo lakaet ar gefridi-se war gont e vewelion... Da c'hortos e kresko c'hoazh an tailhoù, da c'helloud lakaad roll-arc'hant an Arme da vont war-raog eus 24%...

Mont a rafe an den war e barlochoù gant ur farouell distiñget evel hemañ... Beteg ankouaad, pe dost, eo bet lakaet ar Frañs da vatezh ar Stadoù-Unanet gantañ : ar c'hompagnunezhioù etrevroadel n'eus harz ebed a-berzh ar Stad C'hall ewite... Peb tro ma vez un dañjer, ur riskl, ur preder bennag war spered an dud, e teu an Achantour Meur d'o sioulaad gant komzoù braw e galleg flour... Peb tro ma vez un dra newez bennag o tiwanañ e spered an dud, ur preder newez, ur ger ennañ dispac'h pe lewenez, kerkent e vezont perc'hennet gant an Achantour, mall warnañ dal-c'hammad da biaoñ peb tra, hag ez a neuse an Achantour da Vestr-keginer hag e vez aaset gant ar gerioù hag ar prederioù-se ur geusteuenn liberal : dont a ra Jiskar evelse da vezañ ekologour, ober a ra van da vezañ nec'het-bras gant an natur da viroud hag an energiezh da arboellañ. Mes, gant e aotre hegarad ha madelezhus, e talc'h « morvleidi » ar sevel-tier da zont lard. Kendelc'her a raer da astenn hed-ha-hed d'an aotchoù mur difesson ar beton, en desped d'al lesennoù, d'ar c'homzoù, d'ar promessaou... Ober eus Breizh ur vro didud, setu ase kevrenn nemeti an dius. Pe neuse ober anezi un tachenn frank ewid an arme. En degouez-se, n'eus ket amzer da goll na prezegennoù hir da ober gant diorroadur ekonomikel ar vro, na gant ur steuñvenn ewid an Arvor.

Paotr ar rannvroioù dre gomz, paotr ar Frañs dreistkreiselat dre ober, sed ase Jiskar. Lusker ur Chart Sewenadurel ewid Breizh, mes na c'hoant na youl politikel ennañ d'he seweniñ. Nec'het Jiskar gant ar skinlec'hioù dieub, a c'hellfe, eme « Lizher an Astennerezh », roiñ bod d'un emrenerezh ! Jiskar o tiskar an espern-pobl gant al lesenn newez aneheb ar C'hengredadoù, un arc'hant espernet a c'helled gantañ postañ er

# POBL VREIZH

rannvroioù hag e zerc'hel pell diouzh krabanadoù kanfarded Paris. Jiskar oc'h ober e vestr, eñv e hunan, war bolitikerezh an Départementoù hag ar Broioù Tramor, ma vezer o klask korvoiñ pe an dud anehe pe pinwidigezhioù ar mengleuzioù hag ar morioù anehe.

Emaomp plom e marewezh an abostolerezh hag an drouktunerezh. E-kehid ha ma oad o roiñ bod war zouar ar Frañs d'un nebeud repuidi eus an Indochin (en ur ziwall memes-tra e ouife an tud-se un tamm galleg bennag, pe e vefent bet kenlabourerien feal eus ar Vammvro Drevadennores), en amzer-se dress e oad o kempenn dekredoù da skarzhañ al labourerien a-ziavaes bro, pe da lakaad bresk ha diassur o chomadenn er Frañs. E-kehid ha ma oad oc'h ober un tammig van da vezañ feuket gant politikerezh gouennelour Afrika ar Su, e vese gwraet un degemer eus ar c'hwekañ da Vinistr an Aferioù Estren eus ar Chili, o tont amañ a-berzh ar muntreer Pinochet. Pa 'z eo bet kasset Bokassa d'an traoñ, mell-divell, eus lein e dron alaouret, n'eus ket bet a-berzh ar Frañs ur gomz, ur jestr ewid herzel ar bourew bugale m'eo hennezh, hag ez eo en em denet dibistig diouzh aerborzh Evreux...

Emaer o stardañ muioc'h-mui biñs ar c'hreisennañ : bruderezh ewid an nukleel beteg er skolioù, drouktunerezh a-zivoud an energiezh e Breizh, ar Skingomz miret gant ar Stad « ewid kendelc'her gant al lieskredennoù » (ar gavadenn-mañ gant Barre), ar pobloù hag ar strolladoù bihan mouget ha gwasket...

Hag ewid peurlipañ an traoù, ur gavadenn all : roiñ arc'hant d'ar strolladoù politikel hebkén o deus dija beb a guchennad kannaded e Paris... Ne c'heller ket skoñ kreñvoc'h gant ar re a fell dezo chom dizalc'h, pe a fell dezo digoriñ heñchoù newez. Mewelion an Amerik war dachenn al liberalouriezh ekonomikel er Frañs n'eus nemed un hanw da roiñ dezo : kilstourmerion daonet !